

27th Nevez-amzer ar varzhed

PRINTEMPS
DES
POÈTES



Renseignements

Médiathèque
Place d' Auvelais
22310 Plestin les Grèves
02 96 35 60 42
mediatheque@plestinlesgreves.bzh
www.mediatheque-plestinlesgreves.fr

27^e Printemps des Poètes

LA POÉSIE.
VOLCANIQUE

MARS
2025

« Nevez-amzer ar varzhed » - REOLIADUR AR C'HONKOUR BARZHONIEZH digor betek ar 1^{añ} a viz Meurzh 2025

Digor eo ar c'honkour barzhoniezh aozet gant Mediaoueg Plistin d'an holl. Tri rummad a zo : **yaouank, tud deuet ha tud a vicher**, e meur a yezh : **galleg, brezhoneg ha yezhoù all a Frañs**. Goulenn a raer reiñ un droidigezh e galleg evit ma c'hallo an holl profitañ eus ar varzhoneg hag evit ma vo intentet ervat gant an holl varnerien.

Kasit ho parzhonegoù, bizskrivet (pe dornskrivet), ur bajennad A4 a hirder dezhe d'ar muiañ, o plediñ dre ret gant an tem lakaet evit 2025 gant « Nevez-amzer ar varzhed » :

Ar varzhoniezh volkanek

Gant ar barzhonegoù dizanv e vo lakaet daveoù ha oad ar gonkourerien, ha kaset e vefont dre bostel da **mediatheque@plestinlesgreves.bzh** pe, a-hend-all, dre lizher post da « **Nevez-amzer ar varzhed** » - **Mediaoueg, plasenn Auvelais - 22310 PLISTIN** peotramant c'hoazh laosket war-blas.

Pellgomz : **02 96 35 60 42**

Kemer perzh er c'honkour a zo evit mann hag a dalvez bezañ a-du gant embannadur nanngopret an oberennoù gant **ar Vediaoueg**, , ispisial en dastumad barzhonegoù a vo embannet goude ar c'honkour hag a vo moaien da amprestiñ.

Reiñ ar prizioù a vo graet d'ar **gwener 21 a viz Meurzh da 6e30 d'abardaez** e Sal An Dour Meur e Plistin. Ar re ac'h ay ar prizioù 1^{añ} gante a vo profet dezhe ur goumanant ur bloaz da vediaoueg Plistin, pe plasoù evit arvestoù en Dour Meur, pe plasoù e sinema An Douron. An holl genstriverien a vo aze en deiz-se e vo roet levrioù dezhe.

« En em astenn a ra ar varzhoniezh. Gant ar stank m'eo an energiezh hag an danvez bev enni e c'hall gounit takadoù nevez dibaouez. Ar c'hredo-se eo an nerzh a zoug Nevez-amzer ar Varzhed.

E zremm : ar varzhoniezh a laka son uhel ar yezh hag ar spered da zassoniñ, kement stumm a zo anezhañ, ar varzhoniezh evel lec'h a frankiz hag a breder.

E zoare labour : aozañ, broudañ, lakaat en a-raok obererezhioù hag a ra d'ar varzhoniezh en em ledañ, pe e vefe abadennoù bev pe embannadurioù.

E dakad labour : el lec'h ma komzer galleg hag er bed a-bezh.

Live uhelder e nerzh : ar c'hrouiñ a laka ar gerioù da dreiñ e gweledigezhioù.

Hon fal eo lakaat splannoc'h atav ar startijenn a zo gant an doare-se da welet an traoù evit ma vo gwelet ar varzhoniezh evel m'eo hiziv an deiz : volkanek !

Energiezh rik, dislonkadenn faltaziuz, nerzh an traoù bev. »

Linda Maria Baros, Renerez arzel « Nevez-amzer ar Varzhed »